

KANTIK SANT YANN VADEZOUR

Var don : *Euraz an hitti.*

DISKAN :

Jeuz he unan, Jezuz hen lavar :
Sant Yann Vadezour n'hen deuz ket he bar (bis).

An El G^{ab}riel da Zakariaz
 A annons eur mab, a vo santel braz.

Doue he-unan, dre c'hinou an El,
 A verk e vo Yann hano ar bugel.

Dre eur c'hrass dispar, 'raok ma teu er bed,
 He ene dija zo dibec'h ha net.

Gant Doue oa bet choazet a-viskoaz,
 Evit prepari hent ar Messiaz.

D'he ziskibien ker e laro eun de,
 'N eur ziskouez Jezuz : « Setu Oan Doue » !

He gomzou, he skouer d'an holl Juzevien
 A zeske dalc'hmad ober pinijen.

Ne baouez da skei var ar goal dechou,
 A strink en ifern kalz a eneou.

Kalonek e stourm 'vit ar burete,
 Prest, 'vit he difen, da goll he vue.

Hervez bolonte eur plac'h dirollet,
 Dre urz Herodez ez eo dibennet.

O Merzer santel, sikour, ni ho ped,
 Ma vo' hor buez fur ha pur bepred.

Plijet hon diouall, dre ho pedennou,
 A enep ar bed hag he zanjeriou.

Sant Yann beniget, ken karet e Breiz,
 Dale'hit deomp bepred sklerijen ar feiz.
